

COVISION

IANN - GRENNARD

Laquet en rim gant Iann AR MINOUS.

Voar ton Kerneo.

Me a zo eur potr iaouoñq, joaüs ha dizoursi,
Ha na gavan netra guell evit c'hoari dompi,
Ober scolic a louarn ive c'hoas a garan :
Evit chom da nejata, da c'hourn, d'en em gannañ.

Freuzet ez eo ma forpann, freuzet ma giletan,
Diroguet tout ma brago ha ma zoq hep he eillen,
Guenime ouz n'em bilat gant ma c'hamarado,
C'hoas p'he c'barrian er guer me a me bac'hado.

Alies c'hoas hep ma c'hoan, siouas ! me renq tremen !
Ha cousquet er mæs en nos, ô tristan pioijen !
Hac en lec'h n'em zoumetin, petra ran mert fachan :
Coz etourdi ! deus ma zad, a greis tout, a laran,

Ma manic a zo tener hac a deu d'am escus,
Mes ean lec'h zenti, enn he stad trubullius,
Netra mui nemert : fas' rous ! pelloc'h mui ne galvan,
Impossubl ez eo d'he biquen ma c'horijan.

Ma breur ha ma c'hoar ive pelloc'h na espergnan ;
Ar mevel hac ar vatez bembe a insultan !
Pelec'h cacaf'h eur c'hrennard a ve hanval ouzin ?
Impossubl ez eo biquen dont a-benn diouzin.

Betec memes ma mestr scol, caer en deus ma dornan,
N'hen d'eo mui, en nep sæson, vit ober din doujan ;
Queneubent c'hoas ma ferson, queneubent ma c'hure,
Foei ! foei ! foei ! a boes ma fen me a gri e voar n'he.

Bemde hon en pinijen, bemde hon en suplis,
Voar ar zun bars ann ti-scol, d'ar zul bars en ilis,
Ar iaou. p'he choman er guer, elec'h cad ma repos
Na recevan c'hoas, siouas ! nemert ar mill-malos.

Ar potr coz c'hoas dre ann hent hac ar plac'h coz ive,
P'he n'arrian gant eur bern meign a rog din renq bale ;
Ar goer voar ar preneueho ive c'hoas a dorran :
Eur profit hon d'ar goerer ha mignon bras dean.

N'eo quet avoalc'h c'hoas din-me donet d'ho branscaillin,
Dre ma brassan plijadur teuan d'ho insultin.
Bemde din a leront yarvin mui em guele,
Mes mar marvan n'eur plas-all me zonz mont gant Doue.

Ouspen da ze c'hoas ive, vel ma c'hamarado,
E plij din bemde tol meign bars ar chiminalo ;
Goude terrin ar goter, e torran an trebe,
Coll a-gren danve ar pred, ô pebes goas hon-me !

P'he n'arrian c'hoas gant quistin, prun, per pe avalo,
A tic'hourdan prim ma brec'h, tisontran ma zello,
Ma daou droad prest da redec mar gari ar perc'hen :
Ze zo caus ma zon hep toq hac ive dierc'hen.

P'he n'arrian c'hoas gant ar stal deus ar bonboniguo,
Pe guentoc'h gant eur stal-all, ma ve c'hoariello
E ran bepret ar voyen, quent evit ma tec'han,
Da atrap eur sort pe sort, goez a bet na vanquan.

Alert ez on da redec ha ret eo din bean,
Meus quet ezom a zoguo da donet d'am mouchan ;
Meus quet ezom c'hoas ive, nep-guis eur jorguello,
Me renq crappat bars er goe, lampat dreist ar murio.

Ar per deus ann espailler a glenquan em jave,
Betec mesq ar c'heres azean em c'hoaze ;
Tout e zingt mad evid'hon : betec eur chopinad,
Me a efe couls a c'hui, Minous, ma c'hamarad.

Eur cigaren a fuman, hac ober ze joaüs,
Cred, enn tre ma vezin iac'h, me vo potr evurtis ;
Croze na gen quet ac'hanon, hac'hado quen neubet :
Quen custum hon deus an tol quen mui n'en zantan quet.

Ann dud vras oll a groz din hac am insult bemde,
Ne meus pelloc'h hano mad en hep guiz digant-he ;
Fripon, marmous, crougaden : chetu ann hanoio
A meus bemde da receo, dre-oll meus reprocho.

Galvet e ve ar gendarm, en avis ma spontan ;
Comzet din deus ar prison, prest a vet d'am c'hlenquan,
Mes aman a zo eur potr ha n'en deo quet spontic ;
Antren bars er plas-se zo din c'hoas abredic.

N'en deus quet pell, evit guir, voar ma brassa despel,
E tic'hougis gant eur min eun env coant da voelet :
C'heman oa eur voa vian, a oa brun ha faro...
Me, malurus, a zo caus mar gueo breman maro.

Eur momedic d'ar goude, oar ma brassa glac'har,
E clasquis ive affer, siouas ! ouz eun evn-iar,
Ha ma torris he vorzet, ret a oa e scarvoan,
Ann effet deus ma zol min a res dean camman.

Prestic goude e c'afiz eur c'ham oar boez flao,
Ma laeris dean eur fla ha m'hen lezis eno
Bepred epad peder heur da ruzan ann douar ;
Me c'hoarze, a c'hallompe, diouar boes ma zaer gar.

Na arretis quet eno, c'hoas a ris eun tol-fall :
Monet da sachan he varv, siouas ! d'eur paour quoz dal
Pehini gant nerz ouzin, vit guir, a zistroe :
M'hen dije bet ma zapet na oant quet en buc.

Eur vuc'h ive a gavis oar ann hent o peurin,
Ha ma commansis gant meign ractal d'he branscaillin ;
Galompet a moa anei oar hed eun hanter leo,
C'houlan quet ve he ferc'hen aman ouz ma jileo.

Eur marc'h bian ha treut, me gred marc'h eur portier,
Ia, eur marc'h hag a ouie querzet scanv ha liger,
Ive c'hoas a vrancaillis, quen a res chiboudic ;
Guir eo ma na chenchon treign, me vo clenquet prestic.

Eur plac'h c'hoas gant læs pe guentoc'h gant coavon,
Oh ! p'he sonjan barz en ze e fatiq ma c'halon,
A greis tout a tiboudis gant eur min ar goassan ;
Chetu fotet ar mare hac ar plac'h o voelan.

Aboe, velquent, meus laret e chanchin a vue ;
Eno na moa nep profit, hac ar plac'hic paou-se,
Me gred e oa eur vatez, er guer p'hen harije,
Marteze divar ma fen he dije he c'honje.

Ma renqfen aman contan tout ma oll defojo,
Ve c'hir ma c'hovision, adieu, quen a vezo ;
Pedet Doue evid'hon ma n'em gonvertissin,
Marteze e vin furoc'h vit na zo c'hoas hinin.

Ar rezonamant d'ann den hac ar squient ive,
A laqda chanchamant vras, n'eun tol en he vue ;
P'he vin-me ari coz-potr bepret me a gonto
Petore goas a vin bet o commans ma deio.

Achu eo ma femzec vla, chetu me em c'hoezec,
Ar zonz deus ma zolio quer rent ac'hanon mezec ;
Adieu d'ar grennardiach, breman me a c'heuillio,
Vell en giz d'eun den iaouanq ann oll assembleo.

Mar boant guel botr en crennard, breman ez on ive ;
Na vranscaillan quet a dud, guir ez eo quement-se,
Na lac'han quet a evnet, a ier, a c'houidi,
Mes bepret e conduan ar vue dizoursi.

Quebest bepret d'ar merc'het, en peb couls a roan ;
Hostis c'hoas hac hostises en peb couls a iennan,
Voas a ze eo d'an hini en em fi en enhon,
N'en d'eo quet guel gomod dont a ben ac'hanon.

Ha clevet ta oc'h eus-hu, aman, ma bugale,
Covision lann-Grennard dirac tud he gontre,
Dirac he amezeien, memes he vignoned,
Leret din hac eo dign da vezan absolvet.

Allas ! me voel n'en deus quet ar guir gontrition,
A bellec'h ta ouffe cad en nep guiz ar pardon
A guen alies a grim vel men deus commetet :
Memeus potr, emean, vo n'amzer da zonet.

Na roan quet vit exempl, dec'h, vit guir ar poir-man,
A bec'hini dirazoc'h, bugale, a gomzan;
Lezet ar veign a coste hac ar c'hoz respetet ;
Bet guel ganec'h eur beren da derrin o sec'hed.

Net quet bepret n'eur jardin hac a vezo muriet
Belegout a vec'h en noas gant ar mestr dionisquet,
Staguët eno ouz ar brang pe ouz corf ar vezen,
Exposet en pad ann de da biqu ar c'heillen.

Letet quet a langa vil, net quet a Douc,
Ha c'hui a vezo c'hanval, bugale, ouz ele ;
Pa pezo groet ho cresquans hac arri en ho ment,
Mar bec'h fur en crennardet, neuze oll c'hui vo zent.

Zentet ouz mamm ha tad hac ive ouz mestro,
Ar reze gant ar rezon bepred o quelenno ;
Ha mar guelet eur c'hrennard hac a vo vicus,
Tehet buan diouthan, rao d'ec'h eo daujurus.

Zentet ouz ho mestro scol, na c'hrognet quet outho,
Na c'hoariet quet bars er c'blast ha c'hui biijo deze ;
Disguin goel ho quentilio a c'hent-all a refet,
Na sortifet quet er mas en guis d'ann azennet.

Na chommet quet c'hoas ive epad an ofiso,
Ma bugale, da c'hoari biquen nep sort jeuis ;
Vel ma z'eo ar jeu gaoch, ar jeu bic-a-pale ;
Pa gleofet ar c'hloc'h o son tachit prim da vale.

Euzes ee ar famil, a zav bugale
Formet gant eur regim vav : gloar a deudic'ho,
Eun trouzer, eun tapager, n'eo pelloc'h estimet,
Comzet dit deus ar c'hrennard hac a n'em dalc'h parfet.

Estim he vro en entier a zo groet evithan,
N'en deus mert an dud zod a gusfe anean,
Ann dud heb intelligens hac ann dud digompren ;
Groet bepret gant ann dud fur, dre-oll antretien.

Hir a ve ma c'hanaouen ma talc'hfen d'he c'hentan.
Quen a vo ta, bugale, ec'h an d'en em rentan
Bremen bars ar solitud, ha quent mout ac'hane ;
Covision eun den bras me a mio groet ive.

Piou benag a dezir goud piou eo ar c'homposer
Deus ar ganaouen ver-man, breman, voar ma flender,
Me a lavaro dean ez on hanvet Minous,
Neubeudic euz ma nissan vit guir ez on jalous.

LANN AR MINOUS.

L'œuvr en profit ann oll ganerien.

(Propriété.)

Lannhuon, e ti intanvez Ar Goffik, moular.